

War vor gant ur gador-ruilh !

C'hoant 'neus ober tro Europa war ur vag koad ekolo penn-da-benn evit reiñ c'hoant d'an dud nammet mont 'maez ar gêr.



Marc a blij dezhañ dont da avelañ e benn war ar porzh e Douarnenez.

Foto Gilles Pennec

A-viskiozh eo bet Marc Dufeil, 52 vloaz, sot gant ar bagoù kozh. 'Blam d'an dra-se 'oa deut e 1988 evit gouel ar bagoù e Douarnenez. Pemzektez warlerc'h e oa tregont vloaz. C'hoant 'noa bet splujañ e porzh ar Rosmeur. Dallet e oa bet gant gouloù ar bagoù hag ar c'hae. Eñ ur gwir sportour boaz da redek ar marathon pe d'ober triathlon, 'noa splujet en dour pa ne oa nemet ur metrad dour. An izelvor e oa. «Tost oan bet da vervel. Dour 'oa ba ma skevent. Torret ma goùg.» Ar medisin 'oa deut just e koulz. Kalz tud 'oa war ar c'hae. Seizet eo Marc abaoe an devezh-se. Hervezañ n'eo ket bet ken diaes se. «N'on ket marv, startijenn 'moa da gregiñ 'barzh». Memes tra en doa ranket chom e-pad daou vloaz e kreizenn Kerpab e-kichen an Oriant ! A-drugarez d'ar sport marteze eo deut a-benn da zont war-c'horre en-dro, sportour eo bet a-viskiozh, boaz e oa da splujañ e pep lec'h. Hag un dra all : techet eo da welet tu mat an traoù. «E kreizenn Kerpab e oa kalz tud nammet, tud gwashoc'h egedon», emezañ.

Sant Pêr Plewenn

Goude e wallzarvoud e oa aet Marc en-dro da chom e Sant-Pêr-Plewenn e-kichen Dinan. Ranket 'noa deskiñ ul labour all. Desket 'noa implijout an urzhiataerioù da labourat er gêr evit tier-moullañ. A-raok e oa artizan livour. Livañ a rae koad, marbr faos, panneloù bruderezh evit ar stalioù. Met ar c'hoant 'oa gantañ da zont da chom e Douarnenez lec'h 'oa bet darbet dezhañ mervel. Kavet 'noa un rannid, daou c'hant metrad eus lec'h ar gwallzarvoud ! Hag aze nepell eus ar Rosmeur en doa staget gant e raktres ober tro Europa war vag. «Ar raktres a oa ganin dija a-raok ar gwallzarvoud, beajiñ gant ur vag kozh e koad». Div veaj 'neus c'hoant Marc ober

war ur vag ekolo penn-da-benn savet evitañ gant ar chanter Tanguy e Douarnenez. Ar veaj kentañ a badfe daou vloaz hanter war-zu Norzh Europa betek Bergen e Norvegia. An eil, tri bloaz war-zu ar mor Kreizdouar ha Norzh Afrika betek Maouritania.

An aocher

Meur a bal zo d'e veaj; diskouez d'an dud ampechet eo posupl mont war vor e-unan gant ur vag aotomatizet gant un urzhiataer. Da eil: mont en darempred gant tud ar mor e pep porzh, dizoleiñ sevenadurioù all. Abalamour d'e yec'hed e ranko mont d'an aod alies ha ne vo ket e-unan war ur vag. «E pep bro e kavin ur glañvdiourez eus ar vro evit deskiñ

ar yezh ganti», emezañ. Da drede: ur vag ekologel e vo, e koad penn-da-benn. Ur c'hatamaran gant lienou, panneloù heol, rodoù avel, ur viñs-tro d'ober tredan. Takenn petrol ebet ! Naetaet e vo an dourioù lous ouzhpenn. «Ne vo ket saotret an dour gant ar vag», eme Marc. Gantañ eo bet pignet ar c'hoad. Bremañ emañ o klask arc'hant evit peurechuiñ sevel ar vag. Sikouret e vez gant tud e gevredigezh ivez ! C'hoant 'nije dont a-benn da vont kuit da vare gouel ar mor e Douarnenez e 2012. Avel vat dit Marc !

Gilles Pennec

> www.an-aocher.com

> Lexique

*Aocher : marin qui fait le cabotage.
Biñs-tro : hélice.
Izelvor : marée basse.
Kador-ruilh : fauteuil roulant.
Sant Pêr Plewenn :
Saint-Pierre-de-Plesguen.
Seizet : paralysé.
Skevent : poumons.
Ti-moullañ : imprimerie.*

E galleg, en français

Marc Dufeil a failli mourir à Douarnenez en 1988 lors de la fête des vieux gréements. Il a plongé dans un mètre d'eau et s'est retrouvé paralysé, lui, le sportif accompli. Sa vie a changé, il est venu vivre à Douarnenez et s'est lancé dans un projet de tour d'Europe en bateau écologique autonome pour handicapés. Son catamaran solaire est en construction au chantier Yves Tanguy à Douarnenez et il recherche des sponsors.